

CANTIC SPIRITUEL

Var sujet ar **Brinces Judith**, pehini a zibennas **Holofernes**, **Roue**
an **Egypt**, dirac kær **Bethuli**.

Var ton Santez Genovefa.

Pell bras zo em boa bet esper
Da implija lod va amzer
Da ober eur c'hantic breton,
Agreabl da bobl va c'hanton.

Rac se e meus sonjet erfin
E vije util d'am dessin
Trei a c'hallec e brezonec
Un histor gær a meus cavet.

Speret Divin hac adorabl,
Bezit em andret favorabl ;
Guerc'hes santel, va sicouret
Da ziscleria d'ar Vretonet.

Clévet oc'h eus comz alies
Eus ar Roue Holofernes ;
Un den cruel e voa meurbet,
Gant ur plac'h e voe dibennet.

Sonjal' eure dre e buissanç
Ober d'ar bobl en assuranç
E adori evit Roue,
Ha memes evit or Doue.

Mæs ar bobl eus a Israël,
O veza da Zoue fidel,
Ne felle qet dezo suji,
Ma clasqas dont d'o zistruji.

Prepari eure un arme,
Ma voa General varneze,
En esper dont d'o massacri
Dirac ar guær a Vethuli.

Ar bobl-ma, fidel d'o Doue,
A brepar ive un arme
Evit sonjal en em difen
Rac aoun demeus o bourrevyen.

Ur brinces gær, hanvet Judith,
O veza e kær Bethuli,
A laqas choas da gommendant
Alchior, dre ma voa vaillant.

Laqet e voa da Goronal,
Var arme Israël General ;
Petra benac'h n'oa qet christen,
En devoa joa ouz o lezen.

Me o lès da gonsideri
Ar valiç hac ar jalousi
En Holofernes ar Roue,
Pa vel prepart he arme.

Dont eure e-nnan da c'houlen
Ha c'hoant o d'hoa d'en em difen ;
Petra voa o lezen, o Doue,
Pa n'oboissant d'ar Roue.

Alchior dezan a respontas :
Ar bobl-mâ o deus ur feiz vras ;
Ho Doue a zo oll-buisant,
Ha Roue eus ar firmamant.

He buissanç a zo qemen bras,
Ma sicour ar bobl dre he c'hraç ;
Hep dale teuint d'o ranversi,
Mar teuit da glasq o forci.

Holofernes.

Te gomz evel un insolant ;
Me rai dre ur gombat sanglant
Dévi ar guær a Vethuli,
Ha qement den ha zo enni.

Bars pemp devez hac hirio,
Mar bez beo, te sur a velo
Oun brassoc'h eguet o Doue,
M'o lazo tout abars neuze.

Alchior.

Allas ! pobl paour, mervel zo ret,
Holofernes a zo fachtet ;
En em laqit en orèson
Da bidi Doue a galon.

D'o sicour ellout resista
En ur gombat evel houma ;
Bras ha bian ranqer mervel,
Nicun n'en devezo qarter.

Judith.

Va Doue, leun a vadelez,
C'houi ê hon Roue puissant ivez ;
Ho pezit sourci ac'hanomp,
Ha qemerit truez ouzomp.

Na souffrit qet, ô va Doue !
Ve ur maleurus a zeuffe
A benn da derri ho lezen
Ha da zistruch ar gristenien.

Grit ma vezint oll punisset
Evel an Egyptianet :
Dre ho justiç hac ho rigueur,
Distroit ho pobl diouz malheur.

Ha possubl ve, ô va Doue !
Ve ur miserabl a deuffe
Da brofani hoc'h ilisou,
Lec'h ma reomp hor pedennou !

Roit deo ur bunion,
Pa zint qer cruel, qer dirèson :
Grit ma tigo an douar cren
D'o lounqa e punç an ifern.

49

265 d/

Qen superb eo ar C'horonal,
Ma é leun a c'hoad' criminal,
Hac e sonch hep hoc'h assistañç.
D'hon laza tout nep repetañç.

En e nerz ma e esperañç ;
Mæs c'houi, Doue, dre ho puissanç
Hac ho craç a ell hon souten,
Ma vezimp fidel d'ho lezen.

O sortial eus e repas,
Permetit, va Doue, dre ho craç,
Pa zeui ar gäin d'en anteti,
Ec'h alfen dont d'e zistruji.

Grit ma teuin da veza trec'h,
Daoust peguen fébl e ve va brec'h,
Da drec'hi e benn d'ar monstr-se,
A fell dezan beza Doue.

Roit din-me ar gourach-se,
Ha laqit em guinou ive
Comzou qer douç ha qer charmant,
M'en decevin en un instant.

Hep offañç d'am virginite,
Permetit ma rin va antre,
Ma ellin, pa vezo cousqet,
Tréc'hi penn ar monst' milliguet.

Evit ma viot anavezet
Evit Doue partout dre'r bed ;
Roue puissant ha General,
Crouer an ên hac an douar.

Va flac'h, ro d'in va boqedou,
Va farfum, va fandoreillon,
Va habit leun eus a berlez,
Wit zaludin Holofernes.

Laqit prest en ur valizen
Peadra da veva ur zizuz
Ebars er c'hamp gant an arme,
Me raï ar salud d'ar Roue.

Leqomp en Doue hor fianç,
M'hor c'hunduo dre e brevidañç ;
Ne refus e c'hraç da ini,
Pa zeuer gant feiz d'e adori.

Me ho ped, pobl a Israel,
Mar doc'h en ho lezen fidel,
Da c'houlen sicour digantan
Da resista er gombat-man.

En em liqit en oréson,
Pedit Doue a vir galon,
Evit ma vimp victorius
Var Holofernes maleurus.

Eliakim, Roue santel,
C'houi oll, Bêleyen Israël,
Gant courach en em gousolit,
Hac evidomp-ni oll pedit.

Ur veach terrupl antreprenan,
Evit an oll e partian ;
Déc'h tout e lavarin adie,
En em laqit dirac Doue.

Ar Vêleyen.

Mont reomp gant ur voez huel
Da hedi an Tad Eternel
D'ho conservi diouz drouc-speret
Er veach oc'h eus antreprenet.

Ho pet sonch ac'hanomp bepret,
Rac tost eo an enemiet ;
Judith, ho pet calz a zourçi,
Allas ! prest voar da gombati.

Santinel an Enemiet.

Pelec'h e zit Princes yaouanç ?
Ho qenet a zo ravissant ;
Perac tra en em exposi
Da gaout qement all a sourçi ?

Chom allac'h e paciantet,
Espern ho poan hac ho yec'het ;
Evelse n'em brecipiit :
Livirit petra a glisqit.

Judith.

En em recour a meus sonjet ;
Qen terrubl e zon gourdrouset,
Mar clasq ar bobl oc'h insulti,
Ma fell din n'em sovetaï.

Me a garfe, hep drouc ebet,
Caout an enor, m'ar permetet,
Da barlant eus ho Coronal
Holofernes, Roue, General.

Ar Zouardet.

Ni a yélo d'ho cundui,
Princes, oll gant hor mousqedi,
Hac ho rento hep drouc ebet
Bete'r C'horonal assuret.

Judith.

Roue puissant Holofernes,
Rampart an oll binvidiguez,
Me garre em be, emezi,
Ur guinou aour vit ho meuli.

Eus ho Majeste an eclat
A ra din mont qen agreabl,
Monet a ran var va daoulin
Dirac ho Majeste divin.

Holofernes.

Princes, dent d'en em assuri ;
Me ho ped, ah ! na grenit mui :
Ho qenet en deus va charmet
En instant ma meus ho quelet.

Va zaoulagad ha va c'halon
Zo en em ravisset qer don ;
Savit prontament en ho sa,
Me eo, emeza, dle soubla.

Judith, contit d'in ar sujet
P'evit tra oc'h ama deuet ;
Ha mar deus poan var ho speret,
Certen o viot delivret.

Va c'halon zo e captivite ;
C'houi ell e denna ac'hane :
Netra tout dèc'h na refusin ,
Ma accordit ar c'hraç-se din.

Judith.

D'ar famin e zint reduiset ;
Eva reont goad an anevalet :
Va sicour allen dèc'h presta
Evit donet da resista.

Holofernes.

Princes, cetu me tout charmet
Dre'n eloqanç eus ho quelet ,
Ne meus sonch nemet ac'hanoc'h,
Va oll fianç a zo ennoc'h.

A bep hent oc'h eus desarmet
Holofernes , Roue an Egyptet ;
Me ro dèc'h graçou souveren ,
Commandit c'houi hivisiqen.

Judith.

Mar permetit, dre ho madelez,
E chomin gant va zervicheres
Da veva herves va lezen ,
Yac'hoc'h calz en em gomporten.

Mont a rin partout da vale
Dre ar vro ha dre ar c'hontre :
Mar em lezit en liberte ,
Me a bedo bepret Doue.

Holofernes.

Princes, noc'h eus nemet pourmen ,
En em gunduit herves ho lezen ;
It da vale dre va arme ,
Me ho recomando deze.

Nep rai droug dèc'h, m'o funisso ,
Rac souden ez int d'ar maro
Nep a guemero effronteri
E nep fêçon d'oc'h insulti.

Deut da velet va zenzoriou ,
Va aour ha va oll finançou ;
Dèc'h-u int , mar qirit ivez ,
Ma ne chenchit a volonteç.

Me ya da dressa ur reqet ;
Ma valeot elec'h ma qeret ;
Mont a ràn d'ho recommandi
Ma teuy va fobl d'oc'h enori.

Vagao, prepar eur banqet
Evit ma teno d'am guelet
Ar pennou bras eus va arme.
C'hoant bras a meus da gomz oute.

Me a esper dre da gaqet
Judith a dle beza charmet :
Qè buan da laret dezi
Dont fennos da goannia d'am zy.

Vagao.

Princes, c'houi oc'h eus gonezet

Graç vad ar Roue assuret ;
Bete bremâ oc'h eus guelet
An amitie en deus bepret.

Dèc'h netra ne al da refus ,
Var e zanvez oc'h ar Vestres ;
Digasset on d'ho supplia
Da zont fenos d'y da goannia.

Judith.

Autrou , me voar em c'hemerit
Dreist va enor ha va merit ;
Mont a ràn ganèc'h assembles
Da veza d'ho Mestr servicheres.

Un enor bras è memes din
Servicha ur Mestr zo quer din ;
Ur Roue quer douz , quer charmant ,
Quer puissant ha quer vaillant.

Judith hac Holofernes.

Prinç , va Mestr , na veritàn quet
Beza ouz ho tol recevet ;
Mes sclêr e velàn ho calon
Carguet evidon a affection.

Hep compliment ec'h azeàn ,
En ho qichen sur e tasteàn ,
Evit contanti ho speret ,
Ha renta d'an oll joaüstet.

Holofernes.

Plijadur bras a guemeràn
Ouz ho quelet em c'hichen bremàn,
A c'hraçou bras em oblijet ,
Va c'halon zo rejouisset.

Dibrit , evit , herves ho cout ,
Me servich dèc'h a bep tra tout ;
Rac me hac ar gompagnunez
A zo charmet ganèc'h , Prinçes.

Arabat eo ober compliment
En ur fest zo quen excelant ;
Yac'h , dispos , debrit hac efit ,
Evit sur er fin e sonjit.

Judith.

Va Frinç , va Autrou , accordit din
Ar c'hraç na davin quet ho guin
En ur fest a zo quen charmant ,
Quer caer ha quen rejouissant.

Holofernes.

Me ya da eva d'ho yec'het
Assambles gant va mignonet ;
Gant joa vras ha rejouissanç ,
Ravisset omp en assuranc.

Judith.

Vagao , an amzer zo deuet ,
Poent eo cass ho Mestr da gousquet :
Goloit-èn gant e lincelliou ,
Hac hon lezit amâ hon daou.

Roit din ar c'hraç , va Doue ,
Hac an nerz d'am brec'h ive ,

M'ellin gant ur goutelacen
Dont da drec'hi d'ar monst e benn.

Evelse o pedi Doue,
Judith o tosta ouz e vele,
Gant un tol e deus dibennet
Ar monst evel ur milliguet.

Servicheres, tosta amâ,
Ne c'heus affer mui da grena:
Dal ar penn-mâ evit cuzet,
Lezomp ar Prinç amâ da gousquet.

Doue ra vezo trugarequet,
Ar vech-mâ e zomp delivret;
Partia ellomp hep spont ebet,
Ar passach zo deomp permetet.

Va breudeur, deomp-ni digoret:
Doue en deus hon delivret.
Admiromp eta ar vertus
Eus ur brinces qer courajus.

Doue en deveus permetet,
Dre zorn ur plac'h dister meurbet,
Dont da zibenna ur geant
A sonje bezan oll-buissant.

Doue dre e zaouarn puissant
En deus grêt din beza contant:
Holofernes zo bet lazet;
Cetu amâ e benn da velet.

Evit test e c'halvân an ên
Oun sortiet pur ac'haue;
Va Æl-mad en deus va miret
Quer pur vel ma zoan antreet.

Gant soign en deus va c'hunduet,
Injur ebet na meus souffret;
Rentomp dezân hon enoriou,
Gloar ha bep seurt meulodiou.

Judith.

Alchior, ha te a ene
Penn Holofernes, ar Roue?
Cetu-en aze otivoada,
Hac e'gorf commancet da vreina.

Alchior, en em c'hra Christen,
Hac en em zoumet d'hon lezen,
Na ve c'hoarvoud a rae ganes
Evel gant Roue Holofernes.

Alchior.

Judith, ia, a griez va c'halon
Me a gred e Toue guïrion;
Me zo prest d'en em soumeti
Quercoulz ha c'houi d'e adori.

Me gred e Doue eternal
Hac en ar Mestr universel,
Contant oun da veza Christen,
Joa ras ba meus ouz e lezen.

Judith.

Deomp var an enemiet,
Ma vo ar victor achuet;
Cousquet int oll bremâ dija:
Sonit an drompill d'o difuna.

Greomp seblant d'o c'hombati,
Evit caout leac'h d'o choqui;
Rac pa velint ar gontel-mâ
Leun a c'hoad, e teint da sponta.

Pa e guelo ar zoudardet,
An arme vezo deroutet:
Sonit ar gombat, trompillou,
Ma zai'r zoudardet d'o fostou.

Ar Santinal.

Vagao, it da zifuna
Ar General, contit dezâ
E ranqer bremâ combati
Ouz an arme a Vethuli.

Lavarit dezân difuna;
Ar gardou aroc a dosta:
Ne fot nemet e gommandamant,
Da livra ur gombat sanglant.

Vagao.

Va C'horonal, pront difunet,
Commanç ar gombat a zo prest;
An enemiet zo deut varnomp,
Hac a ra goap eus ac'hanomp.

Emê'r maleur zo êruet
En nôs-mâ sur, va mignonet!
Hor General zo dibennet
Dre e finessa gant Judith.

Collet omp tout, ret eo tec'hel,
Pa zeo ar C'horonal dibennet:
Tec'homp diouz Doue Israël,
A ra deomp ur glac'har mortel.

Ar Pontifet hac ar Vêleyen a Vethuli.

Criomp buez hir da Judith,
Hor brinces fur, leun a verit,
Ha nerz d'e brec'h victorius,
Pe dre hini Doue zo glorius.

Canit oll gloar Jeruzalem,
D'ar Brinces Judith, peb Christen,
E deus lazet un den cruel,
Evit delivra pobl Israël.

Deomp d'an Ilis tout assambles
Da gana canticou nevez,
Evit menli e Vajeste
Ha dont da veuli hon Doue

Offromp hor c'halon da Zoue,
Hor c'horf, hor speret, hon ene,
Pa vezo'r buez finisset,
M'on recevo er joaïstet.